



Korriganed ha togoù-fouseg

Fichenn savet gant Silvenn Koant

Evit piv ?

evit ar re vras betek ar re CE1

Pal

Asentiñ ouzh ur reolenn, c'hoari dre zaou, selaou aketus ; en em lec'hiañ : dindan, tro-dro, dirak, a-dreñv; lakaat ar spered da ijinañ

Dedennus eo ar c'hoari-mañ evit lakaat ar vugale da sioulaat goude ur pennad embregerezh korf pe e fin ur veilhadeg araok mont da gousket.

Reolenn ar c'hoari

bep wech pa vo klevet ar ger « korrigan », e vo ret d'ar gorriganed sevel, ober tro o zog-touseg ha distreiñ da azezañ endro dindan e dog.

Doare da c'hoari

Dre 2 emañ ar vugale, unan a-dreñv egile ; azezet eo ar c'horrigan a zo dirak ; en e sav emañ an tog-touseg (an hini 'zo a-dreñv). Lennet e vez an istor amañ dindan gant ar skolaer. En ur glevout ar ger « **korrigan** » pe « **korriganed** » e ra ar gorriganed ar pezh 'zo bet divizet.

An istor

« Ur c'horrigan bihan.

Kuzhet eo ur c'horrigan bihan dindan un tog-touseg rak ar glav. Glav-puilh a ra. Kalz trouz a ra an daroù bras spontus, met ne zihunont ket an hunegan bihan a zo kousket mik dindan an tog-touseg-mañ.

A-daol-trumm e wel ar c'horrigan bihan an hunegan bihan . Aon en deus. Pelec'h e vo kavet ur goudor all ?

Met gwidreüs eo ar gorriganed, gouzout a rit mat ! Mennozhioù mat a zo ganto atav. Petra en deus graet ar c'horrigan neuze ?

Kutuilhet en deus an tog-touseg a zo deuet da vezañ e zisglavier, hag, eñ, goustadig, hep bezañ glebiet, a zo distroet d'ar gêr. Korriganig, ur gwir lampon out ! »

Doare d'ober Gant ar strollad a-bezh e vez c'hoariet er sal-fiñval ; Lec'hiet e vez ar vugale war ur c'helc'h treset war al leur ; tu 'zo da lakaat ur skerb d'ar gorriganed da vezañ anavezet.

Amzervezh Amzer da gontañ div wech an istor evit ma vefe cheñchet roll.

Mont pelloc'h Un istor all a c'hell bezañ implijet gant ar skolaer, ijinet gantañ pe get, ennañ ur ger implijet alies a-walc'h evit lakaat ar vugale da fiñval